

394

Ar goz intaon hag he greg iaouank .

(f° 249)

Eun intaon koz tri ugent vla
Na c'hoant dimizi en devoa
Da eur plac'hik a triwac'h bla .

Ar bloa kenta m'int demeeet (1)
Demeus ar voger eo troët .

Ag e maint enon roc'h diroc'h
Goël eunan iaouank evid oc'h .

Na me moa ked o komeret
Nemed vid goalc'hi va roched .

— O rochet dec'h a vo goalc'het
Er poul ar goazi, an denvet

Er siminal a vo serhet
Er klud ar ier e vo fleget,

A ben dissul vo amperzet
Da vont ganec'h d'an offern bred .

Ma lavaro ar plac'het iaouank
An intañv koz zo eur paotrik koant .

Kent pa ie an intañv d'an overen
Vez e goëlet en e zoullen

Breman eur plac'hik iaouank en deus bed
An deus e zillet kempenet .

7

Janseton Buill, 16, Juin 1851 .

(1).— Ms.: bloa ; le sens demanderait plutôt : noz (mais est-ce bien sûr ?)